

## KIS-348 – Gl. génétique

(JE da GE – 15 03 87)

Pehini ar ger mat, hervezoc'h, evit treiñ **génétique** : **genoniezh** pe **hêroniezh** ?

(GE da JE – 17 03 87)

Gl. **Génétique**. Emaomp amañ war un dachenn fiñvus, ken bras eo araokadennoù ar ouezoniezh enni. Emañ hiziv an diskiblezh-se a-c'haoliad war ar Vevoniezh volekulel, eleze ar Gimiezh, hag ar Stlenneg. Pa reas Arzel EVEN **hêroniezh** anezhi, e kennote gweladur e amzer. N'eus skoilh ebet ouzh arver ar seurt termen nad eo a-benn ar fin nemet ur skritell. E'm Geriadur ar Vezekniezh war ar stern, e ran kenkoulz gant **hiloniezh**, dre un abeg a fraezhded : amfraezh e vez an deveradoù diwar **hêr**-. Da skouer, **hilvoneg** b. "code génétique", **glad hilel** "patrimoine génétique" a dizh aesoc'h an intenterezh eget, lakaomp, **hêrvoneg**, **glad hêrel** pe **hêrezhel**... Hogen ne zistaolan ket an termen etrevroadel **genetik**. (Evel ma ran gant **logik**(-) koulz ha gant **poell**(-) ha **kemez**(-) : an arver a ziskouez ez eo ken diziouerus an eil rumm luniadoù hag egile). Pennadoù 'm eus savet a-zivout ar gudenn-se, a vez kavet en ul levrenn da zont eus LAVAR.)